

# MARI-JANIG VRAO

son gavet d'ezi

gant hec'h amourouz

*War eun ton brudet ha nevez.*

1  
E-kreiz ar parkou 'man he zi,  
Ha bep sul da noz ez an di :  
Mari-Janig vrao  
'Gavan gê atao,  
Kana 'ra dalc'hmat  
He c'halonig vat !

2  
Gant an hent bihan me a ya :  
Me glev va dousig o kana  
(Memez diskan)

3  
Hag erru tost me 'wel <sup>'nezi</sup> anet,  
Ha neuze <sup>'lavarant d'ez :</sup> e lavarant d'ei :  
Mari-Janig vrao,  
Te 'vez gê atao.  
Kana 'ra dalc'hmat  
Da c'halonig vat !

4  
Ac'hanta, Mari, te 'zo drant  
Perak e kanez, dousig koant ?  
(Memez diskan)

5  
Setu ma tiroll da c'hoarzin,  
Dioustu eur respont a ro d'in :  
Mari-Janig vrao  
A vez gê atao,  
Kana 'ra dalc'hmat  
He c'halonig vat !

6  
Ha neuze, deus 'la 'barz an ti,  
Ma kavi eun tamm da zrebi.  
(Memez diskan)

7  
Eus ar ganastell tenna 'ra  
Kig sall, amann, eun dorz vara.  
(Memez diskan)

8  
Hag oc'h an <sup>daol</sup> d'ol azeza 'ran,  
'N eur deurel chistr d'in, hi a gan :  
(Memez diskan)

9  
— Evit an dra-ze n'oun ket deuet,  
'Vidout, plac'hig, ne laran ket !  
Mari-Janig vrao  
Te 'vez gê atao  
Kana 'ra dalc'hmat  
Da c'halonig vat !

10  
Me 'c'houlenn ganti dimezi :  
Kement-se a blij kalz d'ezi.  
(Memez diskan)

11  
Hi 'vo eur wregig fur ha mat,  
Bepred kontantet gant he stad :  
Mari-Janig vrao  
'Vezo gê atao,  
Kana 'ray dalc'hmat  
He c'halonig vat !

12  
Pa vo du ma fenn eur pennad,  
Ne vo ket pell d'am laouenât :  
Mari-Janig vrao  
'Vezo gê atao,  
Kana 'ray dalc'hmat  
He c'halonig vat !!

NEUS KEN !

Y. KERLANNIG.

NOTENN. — Arabat kredi, evel ma reer re alies, eman dishenvel brezonegou Leon, Kerne ha Treger. Eun nebeut geriou, hepken, a jench eus an eil penn d'ar vro d'egile. Da êsât lenn hor zoniou, — ken sklêr ha ken freaz o vrezonég a-hend-all, — hon eus laket geriou 'zo e daou zoare, awechou : d'an nec'h, evel ma lavar Leoniz ; d'an traon. hervez giz Kerneviz, ha Tregeriz ive.

Daoust d'ezan beza e BREZONEG, ar skrid-man n'eman ket di-berc'hen. (REPRODUCTION INTERDITE).